

Derrien Per-Jakez (Montroulez 1822 – Montroulez 1865)

**Recit war distrujou braz  
greet gand doureier  
*Al Loire, ar Rhône hag ar Saône*  
Debordet penn-da-benn, e miz Even 1856**

*War ton Gwerz Pipi Gwegwen, euz Ladivizio.*

Eur bern geriou galleg brezonekaet a zo er skrid-se, ken e vez red gouzoud ar galleg evid kompren traou ‘zo. Adskrivet int bet evel ma vezont distaget, hag hervez doare-skriva ar brezoneg.

Iskiz-kenañ eo brezoneg Derrien.

Anad eo e ouie Derrien, evel meur a skrivagner deuz an amzer-ze, kalz gwelloc’h ar galleg, bet desket ha studiet piz er skol, eged ar brezoneg n’anavezent nemed dre an doare ma veze komzet en o farrez.

Spered a garantez, a nerz, a sklêrijenn,  
Iñspirit va halon, konduet va fluenn,  
Evid ma hellin rei d’am breudeur Bretoned  
Detail ar maleuriou a zo nevez erruet.

Fin a oa d’ar brezel, ar peoh a oa sinet  
War kavell eur bugel, eur Priñs nevez-ganet ;  
Gand lore gounezet en eur brezel muntrer  
Or zoudarded joauz a gemere hent ar gêr.

Ar Frañs, trankilizet ha sur euz he repos,  
N’he-devoa ken nemed deg devez da hortoz  
Evid gweled lakaad war font ar vadeziant  
Mab on impalaer, mesajour ar peoh prezant.

Mez eur hri estlammuz, eur hri a zizesper,  
Eur vouez ankeniet-braz, hirvouduz ha pounner,  
Eur hlemm hir ha poaniuz evel an angoni  
A skladas gand ar spont kalon ha gwad pep hini.

En Lyon, en Naoned, en Tours, en Orléans,  
En Grenoble, en Macon, en Chartres, en Blois, er Mans,  
*Ar Rhône, ar Saône, al Loire* ; debodet gand koler,  
A skube gand o dour an dud, an eost, an tier !

Ugent departamant, ma n’eus ket davanañtaj,  
Gand an debordamant o-deus bet gwall domaj,  
Daou droatad warn-ugent e oa savet an dour,  
Gwragez ha bugale a veze oll hep sikour !

Seiz mil den warn-ugent, ouspenn ar re veuzet,  
N’o-deus na lojeiz, na tan, na ti, na boued,  
Gwasoh evdi tud fall chaseet deuz eur vro  
Ne welent dirazo nemed figur ar maro !

« O ! Doue gallouduz, petra az-teus ‘ta greet

Ar valevruchen<sup>1</sup>-ze, siwaz ! ken glaharet ?  
Pe eun êl, dre hoh urz, pe ar spered malin  
En-deus degaset de<sup>2</sup> ar spont, ar haoñ<sup>3</sup>, ar rivin ? »

N'eus ket gallet goud c'hoaz ped den a zo kollet,  
Ped parkad ed a zo gand an dour distrujet,  
Petra 'zo a-voaienn<sup>4</sup> 'hed da hent an debord,  
Ped ti 'zo distrujet er zao-heol koulz hag en nord.

Ar hirri, ar hezeg, hag an hentchou-houarn  
A zo chomet eur miz hep kaoud tud d'o gouarn ;  
Ne helle den bale deuz an eil kêr d'eben,  
Ken uhel hag eur roh e oa an dour er blennenn.

Kerkent evel m'en-deus kri ar glahar klevet,  
Napoleon a zo deuz Pariz deredet,  
Evid degas sikour ha koñsolasion  
D'an dud rivinet oll, leun a zezolasion.

C'hweh-kant mil livr arhant a gonter etre toud  
Kement en-deus roet d'an dud kêz en e roud,  
Kaset en-deus ouspenn eur Jeneral vaillant  
Hag eur ministr dezañ da rei de soulajmant.

Kement a valeuriou, eur walenn ken pounner,  
En-deus pouset an oll da ober o dever.  
An dud pinvidig-braz ha memez ar beorien  
O-deveus asamblez laket aour ha gwenneien.

Parzi hepken en-deus dre eru zouskripsion  
Savet kazi raktal tost da bemp milion,  
An oll gêriou a Frañs, koulz hag ar hampagnou  
Gand an hast ar vrasa o-deus kaset ofrañchou.

O ! paper konsolant e' se gweled hirio  
Lezenn ar garantez ken heuliet en or bro !  
Pegen dous e' soñjal e chom ar bobl fidel  
Da vaksimou ar feiz, da zoktrin an aviel !

Ar garantez ez e' ar fondamant gwirion,  
Ar merk hag ar breuvenn euz ar relijion.  
Karet Doue dresit-oll ha goude on nesa,  
Deuz ar zilvidigez a zo an daou boent kenta.

Gweli peger buan, gand pegement a bres,  
Gand pegement a joa ha laouenidigez  
E teu ar bobl añtie da rei soulajmant  
D'ar famillou viktim demeuz an debordamant.

---

<sup>1</sup> valevruchen : ger bet ijinet gand an oberour : mal-evrus-enn.

<sup>2</sup> de: deze.

<sup>3</sup> haoñ : ar hañv.

<sup>4</sup> a-voaienn : ?

Ar pinvidig a ro deuz e zanvez deze,  
Ar paour-kêz ouvrie a labour evite,  
An domestiked kêz gand o gajou bihan,  
O-deus sakrifiet gwenneg diweza o foan.

Eun aksion ken ker, ker braz, ker jeneral,  
Eun egszempl ker touchant roet da dud evuruz  
En-deus greet avi d'an Europ an añtie.  
Mantret, evel ar Frañs, euz distruj an doureier.

Bro-Zaoz, ar Piemont, an Almagn, an Holland  
Ar Beljik, ar Suis, an Aotrich, ar Brabant,  
An Danemark, an Ekos, ar Spgan, an Itali,  
O-deus kaset arhant da Bariz heb diferi.

Hervez ar pez a zo skrivet er hazetenn  
E timuni an dour, hag e komañs diskenn.  
Kazi an oll hentchou a zo dibaraset,  
Hag an dremenidi a hell c'hoaz dond ha moned.

Er memez bilajenn, pevarzeg ti 'zo bet  
Gand an doureier braz difontet ha skubet.  
Ouspenn tri-ugent loen 'zo bet beuzet enne  
Heb ma'z eus bet gellet savetaad unan aneze.

Hag ar pez a rante an dour dañjerusoh  
E oa c'hwez eul lehid teo ha c'hoaz marvelloh  
Evid ar poezon vif, hag an hini<sup>5</sup> a vouge  
Dre e vreinadurez, tud ha loened ar hontre.

En-touez an dud koz saveteet dre virakl  
Euz kreiz an doureier uhel abominabl,  
Ez eus bet remerket er gêr vraz a Lyon  
Deuz eun intañvez koz eun admiral aksion.

Ae walevrusez-se o vale dre ar ru  
A gao ugent mil lur ; redeg a ra dioustu,  
Daoust d'he faourentez vraz, da di ar homiser  
Evid depoz eno ugent mil lur en paper.

E-bazr ar memez kêr, eru medisin yaouank  
Anvet Victor Cazeaux, en-deus evruzamant  
Tennet euz foñs an dour pemzeg den risket-braz  
Gand kement a hini d veza beuzet, siwaz.

Kuriuz e kleved en petore feson ;  
En-deveus savteet pemzeg deuz an dour don,  
Penazo en-deus gellet mond ha distrei en-dro  
Heb beza en e hent surprenet gand ar maro.  
Kordenn eur vag vihan a stag en-dro dezañ.  
Kemer a ra daou zen da zikour anezañ,

---

<sup>5</sup> an hini : pini, er skrid orin.

Ha kerkent pemzeg gwech e ploñj en dour uhel  
Heb dilezel unan el lehid braz da vervel.

Rag aon e teufe c'hoaz dour da diloch ker braz  
Ar gouarnamant 'zo hirio okupet braz,  
O klask ar moaiennou da helloud dond a-benn  
D'ampech eur wech all an dour da zond er blennenn.

Ni, kristenien a Vreiz, poaniom deuz or hoste',  
Da bellaad euz ar Frañs gwalenn derrupl Doue,  
Dre bedennou fervant, goulennom, va breudeur,  
Ne mom ket da ouela war eun heveleb maleur.

Doeu hepken 'zo mestr, mestr souveren d'ar mor,  
Pa ga e vez serret, pa gar e vez digor.  
Eur gomz, eru sin hepken hervez fantazi  
Hen laka da vond kuit pa d'antreal en furi.

Evid nompas beza dindan e walennou  
Heuliom e lezenn zakr hag e hourhemennou,  
Ha priñsipalamantgand muioh a skrupul  
Lezom on labouriou ha sanktifiom ar zul.

*Bet embannet e ti Guilcher, e Montroulez.*